

+

## 5vet Sul Fask

« C’hwi ivez, evel mein bev, kemerit perzh e savidigezh an ti speredel evit bezañ ar belegiezh santel. »

Breudeur ha c’hoarezed,

Ar c’homzoù da brederiañ er 5vet sul Fask a gas ac’hanomp da soñjal eus an Iliz a zo o vezañ savet gant Jezuz a-raok bezañ kaset da gefridi da Sul ar Pantekost. Kinnig a ran deoc’h prederiañ war testennoù an deiz dre dri skeudenn eus an Iliz : Iliz, Korf ar C’hris adsavet ; Iliz, Poblarns Doue ; hag Iliz, Templ ar Spered-Santel.

Sellomp ouzh ar skeudenn gentañ : Iliz, Korf ar C’hris. Fellout a ra din loc’hañ diwar ar gomz-mañ eus Jezuz d’e ziskibien: « Pa vin aet da aozañ deoc’h ur plas, e teuin en-dro hag ho kasin ganin, evit ma vo c’hwi ivez eno ma emañ-me. » Jezuz a ro amañ pal e gefridi : lakaat ac’hanomp e kumuniezh gant Doue, evit ma vevimp e prezañs Doue. Ar gumuniezh-se gant Doue a c’hoarvez dre hantererzh Jezuz, ennañ bezañ unanet naturioù doueel ha denel.

« Evit ma vo c’hwi ivez eno ma emañ-me. » : Hennezh a zo Emmanuel, Doue ganeomp, a fell dezhañ ma vevimp gantañ evit bezañ gant Doue. Eñ eo a lak ac’hanomp dirak Doue. Diwezhatoc’h en Aviel e tispieg Jezuz da Fulup e wel an Tad an hini en deus gwelet eñ : Jezus lavar : « Ha ne gredez ket ez on en Tad ha a zo an Tad ennon-me ? » Jezuz a ziskouez amañ e zoueelezh, e unvaniezh bezañ gant an Tad.

An Iliz a gemero harp war ar c’homzoù-se pa vo o donaat ar preder diwar-benn doueelezh Jezuz evit enebiañ ouzh heresiezh Arius, a nac’he doueelezh ar Mab. En testennoù a gas ac’hanomp betek ar Pantekost, e kavomp gerioù Jezuz a ziskouez e keningalded gant an Tad, dre e natur hag e oberoù. Evel-se e c’haller kompren ar gerioù : « Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez. » An Hent eo, rak eñ a gas d’an Tad ; ar wirionez eo, rak Doue eo ; ar vuhez eo, rak den ebet n’en deus ar vuhez nemet drezañ. War-lerc’h Jezuz, hag a zo e gefridi kas ac’hanomp d’an Tad, an Iliz krouet gantañ en deus evit kefridi kentañ kas ac’hanomp da Zoue. Kalz a draoù a c’haller gortoz hiziv digant an Iliz, met he c’hefredi gentañ eo kas ac’hanomp da Zoue.

Sellomp bremañ ouzh an eil skeudenn : Iliz, Poblarns Doue. Ar skeudenn-se a zo tostoc’h deomp hiziv, dre ma’z eo bet lakaet war wel gant Kuzul Vatikan II. Sant-Pêr a zispieg an dra-se : « C’hwi ivez, evel mein bev, kemerit perzh er savidigezh an ti speredel evit bezañ ar belegiezh santel. »

Ar c’huzul a raio ivez ar c’homzoù-se evit diorren belegiezh badeziant an holl feizidi.

Tri dra a seblant bezañ pouezus da adlavaret deoc’h diwar-benn an Iliz, Pobl Doue. Da gentañ, ar vadeziant ne walc’h ket ar pec’hed orin hepken ha ne ro ket hepken ar c’hras santel hag a bermet hor silvidigezh. Evel-just, an div gwirvoud-se eo an daou efed kentañ eus ar vadeziant. Met ar vadeziant a gas ac’hanomp ivez e-barzh Pobl Doue, en un istor, en Emglev en deus Doue graet gant hon denelezh. Ur ment kumuniezhel en deus ar vadeziant peogwir e za an den badezet e-barzh ur bobl hag evel-se n’emañ ket mui e-unan. Ouzhpenn-se, e liturgiezh an oferenn, e tremenomp hon amzer o tremen eus ur mod personel, gant hon "me" bremañ, d’ur mod kumunel ma respontomp evel "ni". Kemer a ran, da skouer, an diviz er Rakskriz :

- An Aotrou Doue ganeoc’h.

- Ha gant ho spered.

- Hor c’halon d’an uhel

- Troet eo war zu Doue.

Piv eo ni ? Pobl Doue a-bezh eo a respont d’ar beleg a zastum ar C’hris.

Breudeur ha c’hoarezed, seul vui ma vezit o sevel ur vuhez pediñ personel, seul vuoc’h e vo ho hini “Me” kemesket e “ni” ar Kumuniezh kristen,

Evelse, ar vadiziant a ra ac'hanomp ur bobl a veleien, ur bobl beleg.

E Testamant Kozh eo ar beleg an hini a ginnig aberzhoù. E gefridi eo adoriñ Doue, hag er memes amzer ma ador Doue, en em ginnig a ra e-unan da Zoue. Pep den badezet, pep ezel eus Pobl Doue, a zo galvet n'eo ket hepken da ginnig aberzhoù, n'eo ket mui a loened met aberzhoù speredel (da lavaret eo, da ginnig o fedenn evel loskaberzh da Zoue), met ivez da ginnig o buhez o-unan, o heuliañ skouer beleien an Testamant Kozh, da azeuliñ Doue. Galvet eo hor buhez, ha n'eo ket hor buhez pediñ hepken, hor buhez a-bezh, da vezañ un azeulerezh kinniget da Zoue.

E Testamant Nevez eo ar beleg an hini a ra an oferenn hag a ginnig, da-heul Jezuz, en ur adkinnig aberzh ar C'hrist. Ar beleg e Testamant Nevez a zo e-kreiz un argerzh treuzfurmiñ. Dre adlavaret komzoù Jezuz a dreuzfurm ar bara hag ar gwin e Korf ha Gwad ar C'hrist e teu ar beleg da vezañ benveg mister an treuzsubstansiadur, da lavaret eo mister treuzfurmatur ar bara e Korf ar C'hrist hag ar gwin e Gwad ar C'hrist. Mister an treuzfurmatur, a zo e-kreiz an oferenn, zo ur mister a dreuzfurmatur hag a dreuzfurm, dre c'halloud Jezuz ha gant hantererezh ar veleien, hor gwirvoudoù denel e gwirvoudoù doueel.

Er mod-se e teu an oferenn, koulz hag an holl re a gemer perzh enni hag an holl re e vez kinniget an oferenn evito, da vezañ lec'h un treuzfurmatur don eus hor bezañs, eus hon gwirvoudoù hag eus hon bed. An Oferenn, dre mister an treuzsubstansiadur hag an treuzfurmatur a zeu diwarni, a zegas ur gwirvoud nevez. Lakaat a ra da vezañ bremañ Adsavidigezh Jezuz, o lakaat ac'hanomp da vezañ tud nevez ha nevesaet. An Iliz, Pobl Doue, a zo un Iliz savet gant ur bobl a veleien, ganet diwar ar galloud treuzfurmiñ a zeu eus an treuzfurmatur graet gant Jezuz; ha war un dro, e ra eus izili he Bobl binvioù ha artizaned eus an treuzfurmatur-se eus hor gwirvoudoù hag eus hor bed.

Erfin, an trede skeudenn eus an Iliz a fellfe din lakaat ar gaoz warni eo an Iliz, Templ ar Spered Santel. Tra ma oa bet krouet ha savet an Iliz gant Jezuz, e tennañ a ra e vuhez hag e gresk eus ar Spered-Santel, a laka anezhañ war a gresk. Al lennadenn gentañ eus Oberoù an Ebestel a ziskouez deomp ur gudenn kresk en Iliz yaouank-tre. Ret vo d'an Iliz d' em ober diouzh kresk niver ar fidel. Evel e pep lec'h e vez jeu hag amañ etre ar Yuzeved hag ar Paganis; hag an dra-se a lak he unaniezh en arvar : an diskoulm vo kavet en lakaat an traou pouezus en diaraok. Er c'heñver-se dreist-holl e vo krouet an diagonelezh evit servijout ar predoù hag ober war dro intañvezed.

Ar Spered-Santel eo just an Hini a sikour an Iliz da lakaat lañs war an traoù pouezus, pe e gerioù all, a sikour an Iliz d'en em ober diouzh an doareoù nevez a zeu war wel ha dreist-holl er chañchamant an amzerioù hag al lec'hioù. Hep skoazell ar Spered-Santel, hep e startijenn hag e nerzh, ne c'hallfe ket an Iliz bezañ diorroet a-hed an amzer, a-hed an istor, hag a-dreuz an holl gevandirioù.

Breudeur ha c'hoarezed, ra sikouro an teir skeudenn-mañ eus an Iliz — an Iliz evel Korf ar C'hrist, an Iliz evel Pobl Doue, hag an Iliz evel Templ ar Spered Santel — da greñvaat hol liammou gant an Iliz ha da vezañ prientet evit gouel ar Pantekost. Amen!

5<sup>ème</sup> Dimanche de Pâques

« Vous-aussi, comme pierres vivantes, entrez dans la construction de la demeure spirituelle, pour devenir le sacerdoce saint. »

Frères et Sœurs,

Les textes que nous méditons en ce cinquième dimanche de Pâques nous font réfléchir sur l'Église que Jésus est en train de former avant de l'envoyer en mission à la Pentecôte. Je vous propose de méditer sur les textes du jour à partir de trois images de l'Église : l'Église, Corps du Christ Ressuscité ; l'Église, Peuple de Dieu et l'Église Temple de l'Esprit-Saint.

Regardons la première image : l'Église, Corps du Christ. Je voudrais partir de cette parole de Jésus à ses disciples : « Quand je serai parti vous préparer une place, je reviendrai et je vous emmènerai auprès de moi, afin que là où je suis, vous soyez, vous-aussi. » Jésus donne ici la finalité de sa mission : nous mettre en communion avec Dieu, pour que nous vivions en présence de Dieu. Cette communion avec Dieu a lieu par l'intermédiaire de Jésus, Lui en qui sont unies les natures divine et humaine. « Afin que là où je suis, vous soyez vous-aussi. » : Celui qui est Emmanuel, Dieu avec nous, veut que nous vivions avec Lui pour vivre avec Dieu. C'est Lui qui nous met en présence de Dieu. Du reste, Jésus développe ceci dans la suite de l'Évangile en expliquant à Philippe que qui l'a vu Lui, a vu le Père : « Tu ne crois donc pas que je suis dans le Père et que le Père est en moi? » Jésus révèle ici sa divinité, sa communion de substance avec le Père.

L'Église puisera dans ces paroles de Jésus lorsqu'elle approfondira la réflexion sur la divinité de Jésus pour contrer l'hérésie d'Arius qui contestait la divinité du Fils. Nous avons, dans les textes qui vont nous conduire jusqu'à la Pentecôte, des paroles de Jésus qui révèlent sa consubstantialité au Père, à travers sa nature, ses œuvres.

C'est en ce sens ce que l'on peut comprendre les paroles de Jésus : « Je suis le chemin, la vérité et la vie. » Il est le chemin parce qu'il conduit vers le Père ; Il est la vérité parce qu'il est Dieu, parce que personne ne connaît le Père sinon Lui, le Fils, et celui à qui le Fils veut le révéler. Il est la vie parce que personne n'a la vie sinon par Lui.

À la suite de Jésus dont la mission est de nous conduire au Père et de nous mettre en présence et en communion avec le Père, l'Église, instituée et formée par Jésus, a pour première mission de nous conduire à Dieu. On peut attendre aujourd'hui beaucoup de choses de l'Église. La première mission de l'Église est de nous conduire à Dieu.

Je voudrais maintenant regarder avec vous la deuxième image l'Église, Peuple de Dieu. Cette image nous est certainement aujourd'hui plus familière parce qu'elle a été mise en avant par le concile Vatican II. Saint-Pierre développe cette idée dans la deuxième lecture : « Vous aussi, comme pierres vivantes, entrez dans la construction de la demeure spirituelle, pour devenir le sacerdoce saint. » Le concile puisera également dans ces paroles pour développer le sacerdoce baptismal de tous les fidèles.

Trois choses me semblent importantes à vous redire au sujet de l'Église, peuple de Dieu. Premièrement, c'est que le baptême ne lave pas seulement du péché originel et ne donne pas seulement la grâce sanctifiante qui permet notre salut. Bien sûr, il y a ces deux réalités-là qui sont les deux premiers effets du baptême. Mais le baptême fait également entrer dans le Peuple de Dieu, dans une histoire, dans l'Alliance que Dieu a tissée avec notre humanité. Le baptême a une dimension communautaire au sens où le baptisé entre dans un peuple et où il n'est plus seul. Du reste, dans la liturgie de la messe, nous passons notre temps à passer d'un mode personnel, avec notre 'je' qui est présent, à un mode communautaire où nous répondons en 'nous'. Je prends par exemple le dialogue de la Préface :

- Le Seigneur soit avec vous.
- Et avec votre esprit.
- Élevons notre cœur.

- Nous ne tournons vers le Seigneur.

Qui est-ce que nous ? Et bien c'est l'ensemble du Peuple de Dieu qui répond au prêtre qui représente le Christ.

Frères et sœurs, plus vous aurez une vie de prière personnelle, plus votre propre 'je' qui participe à la messe trouvera une place féconde dans le 'nous' de la communauté chrétienne, et même, plus votre 'je' personnel viendra enrichir le 'nous' du peuple de Dieu.

Ainsi donc, le baptême fait de nous un peuple de prêtres, un peuple sacerdotal.

Dans l'Ancien Testament, le prêtre est celui qui offre des sacrifices. Sa mission est de rendre un culte à Dieu, et en même temps qu'il rend un culte à Dieu, sa mission est de s'offrir personnellement à Dieu. Chaque baptisé, chaque membre du Peuple de Dieu, est appelé non seulement à offrir des sacrifices, non plus d'animaux mais spirituels (c'est-à-dire à offrir sa prière en holocauste à Dieu), mais aussi à offrir sa propre vie à la suite des prêtres de l'Ancien Testament pour rendre un culte à Dieu. Notre vie, pas seulement notre vie de prière, notre vie toute entière est appelée à devenir un culte rendu à Dieu.

Dans le Nouveau Testament, le prêtre est celui qui célèbre la messe, et qui, à la suite de Jésus, s'offre lui-même en réoffrant le sacrifice du Christ. Le prêtre dans le Nouveau Testament est au cœur d'un processus de transformation. En redisant les paroles de Jésus qui transforment le pain et le vin en Corps et Sang du Christ, le prêtre se fait l'instrument du mystère de la transsubstantiation, c'est-à-dire du mystère de la transformation du pain en Corps du Christ et du vin en Sang du Christ. Le mystère de la transsubstantiation, qui est au cœur de la messe, est un mystère de transformation qui, par la puissance de Jésus et l'intermédiaire des prêtres, transforme nos réalités humaines en réalités divines. En ce sens, la messe, ainsi que tous ceux qui y participent et tous ceux pour qui la messe est offerte, devient le lieu d'une transformation profonde de notre être, de nos réalités et de notre monde. La messe, par le mystère de la transsubstantiation et de transformation qui en découle, fait advenir une réalité nouvelle. Elle actualise la Résurrection de Jésus en faisant de nous des êtres nouveaux et renouvelés.

L'Église, Peuple de Dieu, est une Église constituée d'un peuple de prêtres, issue de la puissance de transformation qui jaillit de la transsubstantiation effectuée par Jésus ; et elle fait en même temps des membres de son Peuple des instruments et des artisans de cette transformation de nos réalités et de notre monde.

Enfin la troisième image de l'Église sur laquelle je voudrais m'arrêter est l'Église, Temple de l'Esprit-Saint. Si l'Église a été instituée et formée par Jésus, elle tire sa vie et sa croissance de l'Esprit-Saint qui la fait grandir et en assure son développement. La première lecture tirée des Actes des Apôtres nous montre une situation de crise de croissance dans la toute jeune Église. Alors que le nombre de fidèles augmente de manière très importante, l'Église va devoir s'adapter à ses nouvelles conditions car elle n'arrive plus à assumer sa mission. Comme dans toute crise de croissance, nous trouvons l'apparition de tensions, ici dans les Actes des Apôtres entre les fidèles d'origine juive et ceux d'origine païenne; ces tensions mettent en cause son unité et appellent l'Église à une réaction : elle va trouver une solution en réaffirmant et en réassurant sa priorité, et elle va s'adapter pour répondre aux besoins secondaires. C'est notamment dans ce contexte qu'elle va instituer le diaconat pour répondre au service des tables et de la charité pour le groupe des veuves. L'Esprit-Saint est précisément Celui qui aide l'Église à assurer ses priorités, dit autrement qui aide l'Église à revenir à ses priorités, et qui lui donne les moyens de s'adapter aux nouvelles conditions qui surgissent. C'est notamment Lui qui permet l'adaptation de l'Église aux évolutions des temps et des lieux. Sans l'apport de l'Esprit-Saint, sans sa souplesse et son dynamisme, l'Église n'aurait jamais pu se développer dans le temps, dans l'histoire et sur tous les continents.

Frères et sœurs, que ces trois images de l'Église, l'Église Corps du Christ, l'Église Peuple de Dieu, l'Église Temple de l'Esprit-Saint, nous aident à approfondir notre propre lien à l'Église et à nous préparer à la fête de la Pentecôte. Amen !